

278

## Adieu da Nicee .

(475, suite)

Adieu eta, femelen ingrat,  
 Pa zoc'h deut da quenta d'am c'huitat;  
 Esperans em boa ous ho credi  
 E vizac'h - hu deut d'am c'honsoli,  
 Var ar narvoenti a quementse  
 Egou en annsi ha noz ha de .

(476)

Cupidon, qent pra vijeñ cousquet,  
 En ho rente present d'am speret,  
 Hac a rê din alies difuna;  
 Mes ne get c'houi pelloc'h eo en gra:  
 Pe c'houi vo pell, pe c'houi vo present,  
 Qementse a zo din indifferant .

No po qen ar satisfaction  
 Da rentout affliget va c'halon:  
 Me a velo hep poan nac arvi  
 Va mignonet ous ho frecanti;  
 Hac a ben ar fin eus an amzer .  
 O amitie chenchet en coler .

An deiz ma torris va chadennou,  
 Pebes scrinijen em oll memprou!  
 Va c'halon bep moment o sempli,  
 Ha va daoulagad enem zervi,  
 O consideri ar boan rigorius  
 O tonet da quitat ur stat qen eurus .

(477)

O clêvet va discours, femelen,  
 En em vantit em eus aouen,  
 Mes c'houi quita ur galon fidel,  
 Va -unaz chanjar vel an avel,  
 Hac a ben ar fin d'an disparté,  
 Eo goassoc'h ho coll vit va hini .

(Vol. II, p. 475-477.)  
 5 str. numérotées.